

- (3) Ar Brinces Clemantin hac ar Prinç a Sax-Cobourg, e fried,
o verza êruet e Montroulez, an 19 a Vae 1843, da 6 heur eus ar mintin,
e ris ractal ar rimou amâ varlerc'h evit presanti d'ar Brinces,
mes na ellis qet effectui va dezir.

D'an Autrou Prinç et d'an Itron ar Brinces a Saxe-Cobourg.

- Eur joa eus ar vrassa a rên dre oll en Breiz,
Ouz ho quelet hirio aruet en hor c'kreiz!
Merc'h caret hon Roue gant e fried a deu
D'en em disquez deomp oll; exaucet eo hor vœu.
Na gomzin qet, Princes, el langach caer gallec,
Mes er simplicité hon langach brezonec.
Neo qet discoursiou bras a blich peur-ordinal,
Mes comzou a zorti eus ur galon leal.
Deurvezit, ô Princes! deurvezit, me ho ped,
Reco va homdach pur, couz evel ho pried,
Ra deuzo hon Doue, divar a lein e droun,
D'ho rento evrus, hac ho pried, Itron,
O tont d'ho peniga dre e vras madelez,
En eur accordi dec'h bugaleigou qez,
Coant evel seligou, mad evel o mam, o zad,
Leal, just, vertuzus, ha carguet a bep vad.
Ra vo Doue ganec'h etropad ho peach,
Evit ho preservi demeus a nep domach.
Doue d'ho peurgarzo eus e oll vadelez,
Ha m'ho rento evrus en ho priedelez.
Graç ma vo va reget exaucet gant Doue,
Hac e viot evrus, Bugale va Roue!

A. Lédan.

(Vol. VII, p. 3-4.)